

D'ar 14 a viz Kerzu

- E 605, ganedigezh en neñvoù sant Venañs Fortunat, eskob Poitiers, mignon santez Radegond sentvuhezour ha savour meulganou meurdeus evel ar Vexilla regis.
- E 720, santez Odila, abadez Ohenburg en Elzas, merc'h an dug Adalric. Patromez Elzas. Ganet e 660, e voe pareet eus an dallentez dre vurzhud da zeiz he badeziant d'he femzek vloaz. Diwezhatoc'h e teuas da vezañ abadez manati Hoenburg, hiziv Menez-Santez-Odila, a oa bet diazezet gant he zad.
- E 1591 e Ubeda e Bro-Spagn, distro da Zoue sant Yann ar Groaz, beleg karmezat, doazhour eus an Iliz. D'e bemp bloaz warn-ugent e kejas gant Tereza Avila ha diwar neuze en em ouestlas da adreizhidigezh urzh ar C'Harmez. E c'hredusted ha berzh e strivoù a voe abeg a amprouennoù betek bezañ toull-bac'het.
- War-dro 460, e Kernev-Veur, sant Gwinier pe Gwengar, abad ha merzher. Hag eñ mab d'ur roue a Iwerzhon e voe kristenaet gant sant Padrig. Pa varvas e dad ez eas en-dro da Iwerzhon hag edo o tistreiñ da Vreizh o kas gantañ seizh kant kenvroad pa voent lazhet e Kernev gant barbarek. War a hañval eo dre fazi m'eo bet hevelebet ouzh diazezeur Pleuwigner e Bro-Wened.
- Sant Eginer, penitiour enoret e Bro-Leon.

D'ar 15 a viz Kerzu

- Er Iañ kantved, santez Sandukt, merzherez gentañ Bro-Armenia. Hag hi merc'h ar roue Sanatruk e voe kanttroet gant prezegerezh an Abostol sant Tadde ha kondaonet d'ar marv gant he zad.
- Er IVre kantved, e Palestina, da vare heskinadeg Maksimianus, merzherenti santez Suzanna. Kondaonet e voe da vezañ dêvet ez vev.
- War-dro 457, sant Valerian, eskob Aversa e Tunizia, feizvonnour. Da vare heskinadeg ar Vandaled dindan ar roue ariat Genserig e voe goulennet-groñs outañ reiñ traezoù al liderezh. Dre ma nac'has e voe skarzhet eus ar gêr, hag eñ ouzhpenn pevar ugent vloaz, hag e voe difennet reiñ bod dezhañ, na dindan un doenn nag en ur park zoken. Echuiñ a reas e vuhez o kantreal war an hentoù dindan ar seizh avel o reiñ testeni divrall d'ar gwir feiz.
- E 669, sant Auberzh Cambrai (Lt. Aubertus, Autbertus), eskob. Sant-paeron ar varaerion. Da gentañ manac'h e Luxovium en doa kroget da sevel abati Sant-Vaast pa voe anvet eskob Arras ha Cambrai e 633. Sevel a reas neuze meur a abati e Flandrez hag e Bro-Hannonia.
- E Breizh, e 1349, sant Yann Diarc'hen pe Divotoù pe Discalceat e latin, lesanvet "Santig Du", beleg. Genidik eus parrez Sant-Nouga e Bro-Leon, e voe person parrez Sant-Gregor en eskobiezh Roazhon. Aet da vanac'h e kouent Sant-Frañsez Kemper e renas ur vuhez a bedenn hag a binijenn hag e varvas o prederiañ klañvidi ar vosenn.
- En Iwerzhon, e 732, sant Flann, manac'h e Bangor.
- Santez Moghain, maouez santel e Clochar en Iwerzhon.

D'ar 16 a viz Kerzu

- E 761, ganedigezh en neñvoù, sant Winibald pe Wineblad, abad e Frankonia. Mont a reas da birc'hirinañ da Roma a-gevret gant e vreur sant Willibald hag o zad, ar roue sakson sant Richarzh a varvas e Lucca e Toscana. E Roma e kejas gant o c'henderv Wynfrid a Wessex alias sant Bonifacius, abostol Germania, hag ez eas d'e heul. Gant e vreur e tiazezas ur manati daouel e Heidenheim e Frankonia, unan evit ar venec'h hag egile evit ar manac'hezed.
- E 999, santez Adelaid (Gl. Adélaide pe Alice), gwreg Otton Iañ eus an Impalaeriezh Santel Germanek. Ur skoazell vras a roas d'an Iliz ha da sevenadur ar vro dreist-holl o harpañ menec'h Cluny. Edo o weladenniñ abati Seltz nepell diouzh Stradsbourg pa varvas.
- Kenkounidigezh Merzherion al Laos, anezho seitek merzher lazhet e-pad brezel Indez-Sina etre 1954 ha 1970: ar beleg yaouank Jozef Tien, kentañ merzher laosat, a-gevret gant 5 katekizer; izili eus Kevredigezh Diavaez Pariz [an Tad Yann-Vadezeur Malo genidik eus Kerrigon a vez lidet e

Breizh d'ar 28 Meurzh, an Tad René Dubroux, an Tad Noel Tenaud, an Tad Marcel Denis, an Tad Lucien Galan], hag izili eus Kengregadur Obladed Mari Dinamm [an Tad Mario Borzaga, an Tad Louis Leroy, an Tad Michel Coquelet, an Tad Visant Henored, genidik eus Pont-'n-Abad a vez lidet d'an 11 Ebrel, an Tad Jean Wauthier, an Tad Joseph Boissel.

- E Breizh, war-dro 658, sant Judikael pe Yezekael, roue Breizh ha manac'h, keneil sant Meven. Ganet e oa war-dro 590 eus sant Judael, roue Devnon (Domnonea), ha santez Prizel. Hag eñ penn-hêr ar rouantelezh e lezas ar galloud gant e vreur Haelog pe Salaün hag e tec'has da lodennañ buhez ar venec'h en abati Gwazel. Goude marv Salaün e voe galvet avat da gemer krog e stur ar rouantelezh hag e tiskouezas skiant ha furnezh. Suraat a reas ar peoc'h e Breizh o liammañ darempredoù mat gant Dagoberzh I añ. Harpañ a reas savidigezh meur a vanati, hini Pempont pergen. Evit en em brientiñ da vont davet e Grouer e tilezas en-dro ar gurunenn hag e tistroas da Abati Gwazel lec'h ma varvas e-doug an nozvezh etre ar 16 hag ar 17 a viz Kerzu 658.

D'ar 17 a viz Kerzu

Deroù sizhunvezh brientiñ Nedeleg. D'an Arloz e kinnig e Iliz, hag hi e bried, he galvadennoù mallus diwezhañ tra m'emañ tost e zistro.

- Kentañ anv Doue: O Furnez.

- E 693, distro da Zoue santez Begge pe Amelia, intañvez en Andenne e kontelezh Namur. Merc'h Pepin Landen, maer Palez Aostrazia da vare Klotar II ha Dagoberzh I añ a Vro-C'Hall, hag e wreg ar wenvedigezh Ida Iduberga e timezas gant Ansegise hag e c'hanas Pepin Heristal a zo hendad ar Garolingidi. Goude drouklazh hemañ ez eas da birc'hirinañ da Roma hag e savas seizh chapel e koun brientilizoù Roma. Diazezañ a reas ur manati dindan paeroniezh ar Werc'hez Vari war skouer hini he c'hoar santez Gertruda a Nivelles, renet gant reolenn sant Koulman ha sant Benead. Ober a reer anezhi diazevourez ar veginerezh.

- E Breizh, er VIvet kantved, sant Briag, abad, iwerzhonad. Hag eñ diskibl sant Tudual e savas ur manati en Avalgor nepell diouzh Boulvriag e Bro-Dreger.

- Bepred er VIvet kantved, sant Tedec'ho, Kembread, breur sant Kadvan.

- En hanternoz enezenn Vreizh (Bro-Skos), sant Crunmaol (Kronvael), manac'h en enez Iona.

D'an 18 a viz Kerzu

- Eil anv Doue: O Adonai.

- E deroù ar IVre kantved, distro da Zoue sant Gasian (Gl. Gatien), eskob. Bez' e vefe unan eus ar seizh eskob bet kaset gant Roma da aviolañ Gallia. Kemenn a reas ar C'heloù Mat tro-dro da d'Turoni (hiziv Teurgn) hag e voe eskob kentañ ar gêr.

- E Breizh, sant Yuzel, abad Landevenneg, merzher e Daoulas. Hervez an hengoun e vije bet lazhet e-ser e ziskibled gant aotrou ar Faou.

- E Breizh, sant Rien, penitiour.

- E 778, sant Flannan (Flamman), abad-eskob, Iwerzhonad. Hag eñ mab ar roue Turlough e tilezas e hêrezh evit mont da vanac'h e Cill Da Lúa. Brudet e voe evit e vestroniezh da brezeg. Mont a reas da birc'hirinañ da Roma hag e vije bet eskobet gant ar pab Yann IV. Prezeget en dije an Aviel e hanternoz enezenn Vreizh (Bro-Skos diwezhatoc'h).

- En Iwerzhon, santez Lioban ha santez Rioghnach, maouez santel.

- En Iwerzhon, sant Maighnen (Maenen), manac'h e bro Dulenn.

D'an 19 a viz Kerzu

- Trede anv Doue: O Gwrizienn Yese.
- Er bloaz 401, e Roma, sant Anastaz Iañ, pab. Diuzet e 399, e voe berr e babelezh. Nerzhus evit talañ ouzh an disivoudoù en em ziskouezas madelezh evit ar gristenion o doa renaviet da-geñver an heskinadegoù. Meulet e voe gant sant Jerom dre benn d'e spered a baourentez ha d'e breder abostolek.
- E 1370 en Avignoun, sant Urvan V, pab. Hag eñ manac'h beneadat e voe anvet abad Sant-Jermen Autesiodurum ha da c'houde e Sant-Viktor Marsilha. Diuzet da bab e tiazezas en-dro ar sez abostolek e Roma met rediet e voe da zont en-dro da Avignoun lec'h ma varvas.
- E Breizh, war-dro 605, sant Judael (Yuzvael). Hag eñ mab dalif sant Judual, mignon sant Meven, e voe tad sant Judog hag ar roue sant Judikael. He gwreg santez Prizel a vez lidet war-un-dro gantañ.
- En Iwerzhon, santez Commaigh, maouez santel.
- En Iwerzhon, e 739, santez Samhthann, priolet abati Urney barzhez. Leun a drugarez hag a vadelezh e voe aotreet dezhi ober kalz burzhudoù e-doug he buhez.
- E 824, sant Manir, eskob, abostolour Bro-Skos. Bez' e voe unan eus avielourion Bro-Skos-Uhel. Brudet evit e guñvder hag e garitez en em ouestlas da sevel ar peoc'h hag an unaniezh etre annezidi an Highlands nevez kanttroet. Diazezañ a reas iliz Crathie e-kichen ar stêr Dee.

D'an 20 a viz Kerzu

- Pevare anv Doue: O Alc'houez David.
- E 217 pe 218, distro da Zoue sant Zefirin, pab. E-kerzh triwec'h vloaz e voe e penn Iliz Roma. Bezet e voe er vered en doa karget e ziagon Kalist da aozañ war ar Via Appia hag a zo bremañ dindan e anv Katacomboù Sant-Kalist.
- E 1073, sant Dominig a Silos, abad beneadat. Genidik eus Bro-Navar e voe harluet gant priñs ar vro hogen degemeret mat e voe e Kastilha gant ar roue Ferdinand a fizias ennañ manati Sant Sebastian e Silos ma voe an abad anezhañ e-doug tri bloaz ha tregont. Adsevel a reas ar veuleudi deiz ha noz, digeriñ a reas ur stal skrivañ a voe brudet-meurbet evit kened al levrioù, dieubiñ a reas ar gristenion taped gant ar Vaored. E vez a zeuas da vezañ ul lec'h pirc'hirinañ darempredet-kenañ.
- E 1908, sant Yann a gCronstadt, beleg. Santelezet gant Henaouriezh Rusia e 1990, e voe ur mestr speredel hag ur burzhudour. Erzerc'hañ a reas gant nerzh an unaniezh etre sakramant an aoter ha sakramant ar breur. Bemdez e lide an eukaristia dirak miliadoù a dud hag e tiorreas ur greizenn evit skoazellañ ar beorion.
- E 625, sant Ursan pe Ursin, manac'h gant sant Koulman Veur, a savas ur manati e Saint-Ursanne en Helvetia.
- En Iwerzhon, sant Eoghan (Even), manac'h e Dún na nGall.
- En Iwerzhon, er VIvet kantved, sant Fachanan (pe Fachtna), eskob kentañ Cill Fhionnúrach, ha sant Fraoch (eleze « Brug »), manac'h en Iwerzhon.
- E 1153, ar wenvidigez Makaer ar Skosad, abad. Hag eñ manac'h beneadat genidik eus Bro-Skos, eus Iwerzhon hervez lod all, ez eas da Wurzburg en Alamagn lec'h ma voe diuzet da abad abati Sant-Jakez.

